

KANAOUEN DA JANN D'ARK

Savet gentel an
 Canou,
 person Landirisiad



KANAOUEN DA JANN D'ARK

TON : *Stourmad an Tregont*

Allegretto Mouvement de Marche

Savomp hor moueziou, kriste - nien, E - vit ka -
- na eur ganaou - en Eur ganaou - en ag a gas -
- so Ha - ño Jann d'Ark da dud hor brol

2

E Domremy e zeï ganet
Euz a garent santel meurbet.
Lagad Doue gant he vennos
A bare varñhi deiz ha nos.

3

Ar genta plac'h euz ar vro-ze
A voa Jann D'Ark e pep doare :
Nerz ha gened, skiant huel,
Kalon flamm ha buez santel.

4

Klevet e ra mouez diou zantez
O komz dezi kouls a bemdez :
Mouez Mac'harith ha mouez Katel,
Ha mouez an Otrou Sant-Mikel.

5

Lez aze d'ha zenvedigou
Da beuri var an torgennou ;
Toll d'ha gigel, kemer kleuze,
'Vit mont da zikour ar Roue.

6

Souezet oll eo Charlez-Seiz,
Pa lavar Jann dezan gant feiz :
Ganen-me c'houi vezo kasset
Da Reimz evit beza sakret.

7

Tud ar Roue, elec'h kredi,
A dol goaperez varnezi ;
Ha kaer ho deus, Jann a zalc'h mad
Eb aoun ebet rag ar stourmad.

8

Ma z'oc'h digasset gant Doue,
A lavar dezi ar Roue,
Me'rodeoc'h brema gourc'hemen
Da henchha va brezellourien.

9

Ofiserien ha soudardet.
Gant ar Roue a zo galvet,
Ha saludi a reont ragtal
Jann D'Ark evit ho general.

10*

Potred Bro-Saôz, divar vrema,
Hopennousount'rankoc'h plega;
Houarn ha dir, elec'h kik sall,
Ho po digant potred Bro-C'hall.

11

Deomp da genta, a lavar Jann,
Da ziboannia kear Orlean;
Rag Orlean a zo goasket
Gant brec'h ar Saôzon dirollet.

12

Kerkent an tolliou, a bep tu,
Var an enebour a gouez dru :
D'ar Gallaoued eo ar gounid ;
Ar Saôzon spountet a dec'h kuit.

13

Evit trugarekat Jesus
Euz eur gounid ken burzudus,
An Te-Deum a zo kanet
Gant beleien ha soudardet.

14

Jann, ato henchet gant Doue,
Var lec'h ar Saôzon a vale,
Savet sount var gein he marc'h du,
Gant banniel guen ha seizen ru.

* Si l'on chante à l'église on peut
omettre ce couplet.

15

Ar guël outhi a ro d'an oll
Nerz ha kalon, fizians dreist-oll :
E pep krogad ar Saôzoned
Gant tud Bro-C'hall a zo draillet.

16

Pedi, kovez, kommunia
A blij da Jann D'Ark dreist pep tra
Ha klevet an ofern santel
Evit kaoût nerz ' pad ar brezel.

17

Setu Jann, e penn an arme,
O vont da Reims gant ar Roue ;
Digemeret eo gant dudi,
Evel Klovis gant Sant Remi.

18

An ilis-veur a zo karget
Gant ar bobl hag ar zoudardet ;
Sellet a reont gant levez
Ouz Jann hag ar Roue Charlez.

19

En he dorn kleiz ar banniel guen,
En he dorn deou ar gurunen
Da lakat var benn ar Roue
Gant an Eskob abers Doue.

20

O kaëra gouel evit an oll,
Hag evit ar Roue dreist-oll !
Gant an Oleo, evel Klovis,
Charlez 'so sakret en ilis.

21

Jann a lavar dezan neuze :
Echu va labour ganen-me ;
Va lezit 'ta, va Roue mad,
Da vont brema da dy va zad.

22

Mæs ar Roue, daôust d'he feden,
Ne ro ket dezi he goulen ;
Ha setu Jann red mad dezi
Chom evit c'hoas da vrezelli.

23

Evit ar Roue hag ar vro,
Da heul Jann D'Ark an dudu sko,
A sko var an enebourien
Evit flastra dezo ho fenn.

24

Siouas ! an avi milliget
A eneb Jann 'zo dirollet !
Dilezet ei gant eun trêitour,
Ha guerzet mad d'an enebour.

25

Setu Jann D'Ark en eur prizon,
Merzeriet gant tud difeson :
Sikour ebet na zeu dezi,
Dilezet ei gant pep hini.

26

Barnerien kris ha testou faôs,
Gounezet gant arc'hant Bro-Zaôs,
A ra da Jann beza barnet,
Ha barnet da veza dêvet.

27

Var dachen-keâr, e kreis Rouan,
E zeus fouezet eun tantad-tân,
Ha varnan Jann a rank dêvi :
Eun truez eo sellet outhi !

28

En dro d'an tân ar Saôzoned
A c'hoarz da Jann, evel tigred !
Bourevien kris, kaër ho pezo,
Biken Bro-C'hall deoc'h na vezo !

29

Evel Jesus var ar C'halvar,
A greis kalon Jann a lavar :
Neket mallos d'Ham bourevien,
Mæs pardoun a fell dign goulen !

30

Eur groaz-ilis 'zo digasset
Ha dirazi huel savet :
Daoulagad Jann, beteg mervel,
A jomm stag ouz ar groaz santel.

31

Jesus ! Jesus ! leir gueich Jesus !
O komz santel ha dudius !
Komz diveza ar Vergerez,
Komz a esperans ar Zantez !

32

Setu echu an torfed bras :
Kleier Bro-C'hall, sounit ar glaz !
Eur Verc'hez flamm a zo maro,
Maro 'vit savetei he bro !

33

Divar nebeut, ni a esper,
O Ilis santel, hor mam ger,
Ni a glevo gant levenez :
Jann D'Ark en env a zo santez !

IMPRIMATUR :

Quimper, le 29 Mars 1895.

E. FLEITER,

Vic. Gén.